

YF_0068_Pasepie Kallag

Pasepie Kallag, pasepie plaen
An hini a oar hen ober hennezh eo ma den
Danset ma merc'h, ha me a gano deoc'h,
Da c'hortoz ho mammig d'arruout ganeoc'h.

Ho mammig a zo danserez, ho tad a zo mevier,
Gwall bell eman en noz pan arruont er ger.
Danset ma merc'h, ha me a gano deoc'h,
Da c'hortoz ho mammig e rin ur bouchig deoc'h.

Me nend on ket dimezet, ma karjen e vijen,
Kalz a dud a-feson a zo deuet ouzh ma goulenn.
Pilhenn, truilhenn a zo ouzh ma goulenn,
Kog an I ha Kog an O, ha Kog an Orio.

Dec'h ez on bet dimezet, ha hiziv em eus keuz,
C'hoant em eus da ouelan, amzer a-walc'h em eus.
Gouelan hiziv, gouelan 'n deiz war-lerc'h,
Amzer am-bo da ouelan ken am-bo bet ma c'herc'h!

Pasepie

Deomp d'an unvet, tra bi di bi pi,
Deomp d'an unvet, tra di bi da.
Choukomp dezhi, o, tra bi di bi pi,
Choukomp dezhi, o, tra di bi da.

Deomp d'an eilvet

Deomp d'an drivet (deirvet, trede)

Deomp d'ar bevarvet (bedervet)

Deomp d'ar bempvet

Deomp d'ar c'hwec'hvet